

DISPUT

DIWAR-BENN AR BRAGO

ENTRE IANN HA JANNET

LAQUET ENN RIMM GANT IANN AR MINOUZ

WAR EUNN TON EZET.

JANNET A GOMZ.

Arsa, ma disclerîn, cleo penoz e mañ kont :
Chetu ar vestroniag, guenitap, amman en font ;
Arri eo ann eur ma voelfomp gant pion heñ ar vonen,
Ia, red vo dit troc brago ous ma c'hotillonon.

IANN.

C'hui istim, ann-devn, Jannedic, a lakfes n'as creden
A rofen dit ar pouer d'ober voar-n'hon lezen ;
Tromplet bras eo da c'heno mar zonjes a rin-ze,
Nann, nas po mui ma brago, pe douan voar ma le.

JANNET.

Allas ! Iannic, divuisq din huan da vrago,
P'he me bemde, gant trubuil, guiz d'ar blei, as tago ;
Me a zo eur guitouzen hac eur voech ven fachel,
A ve kât bepred goall-dost, p'he ven a bell clasquet.

IANN.

Gouir eo out eur penn-follet, pezo goall digompliment,
Ze n'a c'harz quet ma larin dit scler ma zantiment :
Mar groes re da vechantes me ive d'as cafo ;
Cred, vi quet n'es plijadur en z'orc'hen d'am brago.

JANNET.

Allas ! Iannic, intent eun tamm goell ma rezon,
Divouisq din-me da vrago, clevet-rez, tuazon ?
Kaer's p'ho lampall, dansal ha gouingtal ous da nasq,
Mar na me ket a-nean me iell lec'h-all d'en clasq.

IANN.

Divoal, au-devn, na raffles birviquen nep-sort treign,
Quement-ma ve quet honest, clevet-rezte, penn-breign ?
Hervoe pa vi hep brago, te reio menaj-fall,
Kazi meuz c'hoant d'as morgan vit m'am bezo eun-all.

JANNET.

O ! tao din-me, ma Iannic, prim, gant da c'hourdrouzo
Rac me a meuz evid'hout bepred bep-sort louzo,
Pere ouffe as ransan, m'ar bez re didalve,
A dor ann-ol intrigo, me a doug ann alc'hue.

IANN,

O ! tao din ive, Jannedic, gant ta finesso,
Me oar out eur guitouzen, leun a soublesseo ;
De gart ha pevoar-uguent me gleo en deuz bep merc'h
Te, Jannedic, teuz daouzec, mangnt oas voar da lerc'h,

JANNET.

Abredic e zout, Iannic, zont c'hoaz d'am goapaad,
Divoal p'he spo eur façad ne rei quet dit a vad ;
Me deni abenn ac'hannout. gouve gant piou teuz caus !
Cred, me a rai dit dansal, hac en de hac en noz.

IANN.

Divuiskan dit ma brago, neo quet a leveres,
Rei dit ar gommandammant, droejo ann tieguez,
Rei dit droet da gommandin betec barz ar parco ?
Mar zonjes vin da vevel eo guel-vas da gueno !

JANNET.

Manq bras o c'heuz, ma Iannic, o tont d'am refusin
Deuz a pez a c'houlennan, roet ho prago din,
Ma na roet quet an dra-ze, Iann-gommer, Iann-bitel,
Me a rei d'ar c'hoq canan n'ho cao, en ho crignel.

IANN.

O n'em distromp, Jannedic, me vezo dit en ieed,
Me divoallo ma boesson, a divoallo ma eed ;
Te a zo eur vechantes, ha hervoe ma voelan,
M'ar na's p'he quet ma brago, te rei din perissan.

JANNET.

Kun ho pezo, ma Iannic, ho tonet d'am refus,
En despet d'em zantiment, ar brago c'hui a uz ;
Divouisk din da brago, Iann-bitel, p'as pedan,
P'he me iell barz er votten, voar ma fenn, da roulan.

IANN.

O roul ar pez a garri, Jannedic, ma groeg vrao,
Vit mar querez, eur votten a meuz placet em c'hao ;
Querz d'am fress ka querc'h ive quement a zo em ialch
Mar as tapan me lako a-voar-nout eun tam dalc'h.

JANNET.

O dalc'h a pez a garri, me intent bean mest.
Mar na me quet da vrago, Doue aman da dest,
Bemde me a digasso, en eur fesson spontus,
Ia me a rei boltrenno hac a vezo frommus.

IANN.

Boltren ar pez a garri, Jannedic ar penn-foll ;
Diviskan dit ma brago a ve din eun dra droll,
Dalc'h mad d'as cotillonon, lez ma brago guenin,
Meuz quet ezom a verc'het da zont d'am c'hommandin.

JANNET.

Allas ! Iannic, m'intentet calz guelloc'h vit na ret :
Divouisket din ho prago p'he me, nep dout-a-bet,
A rei diez ho cuele, a rei ho souben treut,
A lardo dec'h ho crampoez, divoar bec ma bis meut.

IANN.

Fallan itriect a teuz te, Iann-gommer, Iann-drutel,
Te voar tennan he guitto goell-don d'as Iann-bitel ;
Mill ha mill gouech moa clevet a oaz eur plac'h a nei,
Tarcho brao teuz groet d'in-me, a c'hoas, hep dout terei

JANNET.

Allas ! Iannic, na chom ket keit-ze da dournezin :
Divouisk d'in-me da vrago, p'he deuan d'as pedin,
P'he dalc'ho a-c'hanout hed eur mis hep rochet,
Garguo o c'hoent da vuele, quen n'alli mui cousket.

IANN.

O fallan pezh amprevan ! biscoas vouelis da liou,
C'hoant teus ta a vent taguet, en beo, gant ann astiou,
Cargan a c'hoen ma guele, goulou ma c'horf a laou,
Divoal p'he savo brujo amman'treomp hon daou.

JANNET.

Allas ! Iannic, chileoet ar pezh a laran dac'h,
Divouisket din au prago, pell voalc'h-so man gonnac'h ;
Ma na ret ket an dra ze me c'ha da bartian,
Ha da laret dac'h, Iannic, quen-a-vo ar c'hentan.

IANN.

Goall-dost he talhes din, Jannedic, ma groeg coant,
Terripl, velkent d'am brago, o ia, te a teuz c'hoant,
Parti arrog p'he garri, me bepret hen miro,
Nan, biken na gonzantin rei dide ma brago.

JANNET.

Poent bras eo dac'h, ma Iannic, intent pezh a laran,
Divouisket din ho prago, p'he me ha da fontan
Quement goerea zo aman hac ive quement pout [en gout
Quement plad, quement poudez, cred, n'hen hon mui

IANN.

O tor a pezh a garri p'en d'out da ze en plas,
Mar keres a ri gante bemde monnei en mass ;
Bez sonch, bepred, Jannedic, quen terrin ma foudo,
Penez n'eo quet c'hoaz arri zul ar C'hasimodo.

JANNET.

Allas ! Iannic, intentet eunn tam guell ma c'homzo
Ha na vet ken tournez de rein din ho prago,

Ma na ret quet ann dra-ze, me grogo n'ho collier,
Ho tiskaro d'ann douar Iannic ar piteler.

IANN.

Goall rust ez eo da dolio Jannedic, ma groeg quez,
N'on mui vit ho suportin, c'hoas a fontan gant mez..
Red eo din plegan dide ha zentin ouz d'urzo,
Divuisq da gotillonon ha guisq primm ma brago.

JANNET.

Guisq primm ma c'hotillonon brema ta, ma Iannic...

IANN.

Guisq te bepred ma brago, ma fried Jannedic.

JANNET.

Guisquet meus eur vraguezen hac ezet e c'havan.

IANN.

Guisq e ben eta ive : zell te mestres breman !

*Impilog Jannet d'ar groague ha d'ann ezac'h
ouz n'em voelet mestres.*

A vec'h aze c'hui, ezach, o tominan ho coague,
O ! ma vijent, evel-d'hon, mechant ha didalve,
A rajac'h vel ma Iannic : a cedsach d'ho prago ;
Me meus goneet m'hinin, vel just, dre vac'hado.

A vec'h ase c'hui, groague, o plegan d'ho c'hesac'h,
N'oc'h nemert poultronezet, en peb couls, en peb lac'h
M'ho pije groet, evel d'hon, ho mechant, ho penn-fall,
Ho poa oll peb a vrago, red eo din ho tammal.

Mad ez eo bezan gentil, mad ez eo bean dous
Belec eur certen muzur. Pa deuogt d'ho courdrous
Na spontet quet dirag-he, croguet en ho c'holier
Hag o pezo ar brago hep dale pell amzer.

A vec'h aze, dirague, quen aonnic ha quen mist,
Ho lapenno guenac'hu bepret oar eun ton trist ;
Ma carfac'h, gant eur fassat, casfac'h ho coaz d'he gorn
Me meus casset ma hinin, merc'het, gant eun toll dorn

Chetu me victorius, merc'het quer, voar ma den,
Gant poan meus labouret, mes meus quet groet en ven
Deut ez eo din ar brago pinin oant ouz en clasq,
Dre fors lampat ha dansal, ha gouingnt-all ous ma nasq.

Pebez joa zo quet enn'hon ouz n'em voelet mestres.
Ma Iannic a zent ouzin vel en guis d'eur seures ;
N'he gomzo c'hoas qu'en tener, quen dous evel ar mel,
Da vevan em plijadur me so breman en goel.

IANN AR MINOUZ.

(Propriété)

